

RECIT

**Composet a neye var sujet eur Malheur erruet en parouz
Pleuveur-Bodou, e miz c'houervrer 1844.**

Var eun ton anaveet.

Drindet santel hac adorabl,
Bezef em andret favorabl :
Reit d'in ar c'hraç da recita
Ar malheur an truezuça.

Autrou sant Pêr, me ho suppli,
A c'houi ive, Guerc'hez Vari,
Reit din ar c'hraç hac al lumier
Da c'hallout scriva var baper.

Evit recita eur maleur
Arruet en parouz Pleuveur,
Gant pemzec den a so beuzet
Evit mis c'hoervrer tremenet.

An autrou n'adjoant hac e bried
Neus entreze antreprenet
Monet, siouas ! evit ar bloaz
Da Gentilez da vizina.

Pa neus annoncet e c'haje
E voa joaus tud ar c'hontre :
Cat eure tud en abondanç,
Dre ma voa den a consequanç.

Deus ar beure pa int savet,
An devez ma voa asinet,
Ez int ét di d'ho dijuni,
Evit mont d'an od d'ambarqui.

Deportit c'hoas hac e cleofet
Piou voa er gober ambarquet :
Louiz ar bivic, e vap ena
A voa ambarquet da guenta.

Louiz ar Bivic, Jacquez ar C'hor,
Fanch ar C'halvez hac ar Minor,
Pipi ar C'houlz, ar c'habiten ;
Ervoan an Allan, Ian ar Flem.

Fanch ar C'here, Ervoan ar Gô,
Ar Boubennec ha Louiz Oelo ;
Ian ar Poncin, Jilo ar Gô,
Ar Penvoan, Jaequez al Lanno.

Ervoan ar Bivic, Jan-Mari Briant,
Re Barazer ha Ian Vêtrand,
Ha Mari-Louiz an Heri,
Na voa feumeulen nemerti.

Mont a rejont joäsamant
Da Gentilez en eun instant ;
Gant Cals a joa hac a gourac'h
O devez carguet ho fasaj.

En eun dro ez int deut er maez
Demeus ar porz a Gentilez,
En esper dont da finisa
Da voas Penvoern da discarga.

Ar bevien guez na vouient quet
Petra voa deze destinet,
Voa laquet o devez gant Doue
Evit finissan ho bue.

Sortiet ez int asamblez
Dion Gober eus a Gentilez,
Mes goasan malheur ho deus bet,
Ar Flanchec ho devezs quittet.

Ho sonjal dont dre ar rout berra,
Evit arruout da guentan,
Int deut dre od ar Goulmedec,
Lec'h voa 'n nombr bras a guerrec.

An nôz a n'em rentas sombrus,
Pa voant en andret malheuris,
Hac ar gober na leoie quet,
Ma voant touchet var eur garrec.

Gaude bezz touchet ar garrec,
Ar gober n'em gav offrajat,
Hac a deuas da guemer dour
Hep a hellent en em sicour.

Pipi ar c'houlz, pa neus santer,
A lavar d'he vartolodet
Na diampechan ar c'hanot,
Evit commanç cas tud d'an od.

Louis Oelo, pa neus clevet,
Diampec'h ar chaot a neus gret,
Ha laquat anezan var-flot
Evit commans cas tud en od.

O Doue, pebez calonat !
O voelet ar c'hanod o quitat :
Ma savas glac'har bras ha cri
Gant an dud paour o quiniadi.

Ma crient oll, a vouez huel :
O ma Doue, red eo mervel !
Autrou Sant Pêr, porcher an env,
Hon recommandet da Doue.

Fanch-Mari 'r Bivic, ar Minor,
Re guenta a iez gant ar mor ;
Jacquez ar C'hor, a galon vad,
A iaz en aviz o c'hero'hat.

Aben ma voant bet distroet,
E voa ar gober avouillet :
O Doue, pebez calonat !
Ne voa den 'vit o sauvetat.

Louiz ar Bivic a guiniade
Deus e vreg hac he vugale :
« Adieu, ma fried, ma bugale,
N'en em voelfomp quen en bue. »

Ar buguel paour, pa neus clevet,
En querc'hen he dad eo lamped :
« O ma Doue, ma zadic quez,
Ni renq perissa asamblez ! »

Evit ho ene caeran graç :
A greiz ho spouren hac ho glas,
E teu Jesus d'ho c'honsoli,
D'ho c'herchat d'an env d'en meuli.

Uz d'ar gober eur sclerijen
A voa bet guelet o tisquen,
A zo disquennet voar ho bag
Da guerc'hat ho ineou mad.

Jilo ar Gô a deplere
Da vourg Pleuveur pa dostae :
« Penos, 'mean, antren er guer
D'annons ar malheur er c'hartier.

» 'Tro Doue, ma mestrez vad,
Eman so dec'hu calonad,
Clevet ar malheur erruet :
O querent n'essan so beuet.

» Sortiet a voamp oll a c'han :
Uguent voa anomp hac unan,
Ha n'omp distroet nemet c'hoec'h ;
O goasan malheur e c'he dec'h.

» — Possubl a ve, Zalver ar bed,
A ve bet beuzet ma fried,
Ma breur, ma niz ha ma buguel.
Glac'har a meus beteg mervel.»

'De varlerc'h ar beure, p'e savet,
D'a n ofern vitin ez e ét,
Da offr da Doue he c'halon
Ha da c'houl consolasion.

En bourg Pleuveur a zo glac'har,
Ma zo en plas var an douar,
Pa voa ar malheur annoncet
Gant ar person en ofern bret.

Oll ezint bet epouvantet
En iliz sant Pér viniguet,
Pa c'hé bet clevet ar belec
O c'hervel ane o vemzec.

« Heman zo'r malheur en hon touez :
O vean gret seiz intanvez,
Pemp-a-tregont a vinoret
Ha diou a orphelinezet.»

Bras eo ar glac'har so savet
Neuze gant an intanvezet ;
Ne devoa den o c'honsolje,
Nemet ar mër, henez a re.

An outro mër, pa n'eus clevet,
A lavar d'an intanvezet :
« Tevoet, groagez, n'em gonsolet,
Vit bara dec'h na vanquo quet. »

Pa voa an ofern achuet,
A voa gant ar mër ordrenet
Mont da êsat sevel ar vag,
Ma voa possubl e sauvetat.

Na neuz quet gallet e c'havet,
Nag hini deus an dud veuet :
Ar glac'har zo c'hat commancet
Gand an dud paour, pa n'int eavet.

N'a n'euz cat hini deuz ane
Quen a voa trivoac'h de goude,
A zo daou ane cavet :
Jacquez ar C'hor, ar Boubennec.

Neuze voa cavet Ian Vêtrand,
Ar barazer hac an Allan ;
Na voant quet anaveabl,
Nemert deus ho zammo dillat.

Deus kichen an de ma voant collet
Beteg an de ma voant cavet
A zo bet c'hoec'h miz a amzer :
Cat ez int tout nemert pever.

N'en euz parouz ebars er vro
Evel parouz Pleumeur-Bodou :
Eman ar bevien en tie,
Fournisset ho bara deze.

Ar re incapabl zo bevet
Hac ar re glan a so soagnet :
Ar vinoret so soutenet,
Hep n'en deus defot den ebet.

En Kerzuel, ar c'hont Champagni
A vev tregont paour en he di,
Ha c'hoas a lar e quemerfe,
Quen lezel den en paourente.

An autrou mër hac an adjoant,
Ha Colas Nicol, quer contant,
A lar o derc'hel en tie
Ha doubli ho aluzen de.

Pipi Barzic, 'n autrou ar C'hoz,
Ar veleien, Catho ar C'hor,
Guillaou ar Bail hac ar Marec,
A ra sicour d'ar vinoret.

Daou den deus a barous Pleuveur,
Ho daou e chom en Enez-Veur,
A deuz ar malheur recitet
Evel maz e bet arruet,